

KANTIK

bugel Itron - Varia - Glerin

Diskan:

O Itron-Varia-Glerin,
Binniget ho pugale,
'Zo dirazoc'h war o daoulin,
Ho nerzet korf hag ine.

1

En Zant-Kleve, pa oan bugel,
Ma mamm 'lare d'in gwechall,
Aman dam-dost en eur chapel
En Klerin 'p 'eus eur vamm all,

2

Eur vamm galloudus ha dispar,
'Vel neblee'h na n'eus hini.
Rouanez an new an douar,
Bez fur, ganin 'e'hi d'he-zi.



3

Oh! nag a e'hoant 'ma d'ho kwelet!
Lakis ma foan da ziski,
Ha warlerc'h ma mamm da laret
Rez : me ho salud mari!

4

Gwerc'hez, n'ho chapel gaer Klerin
P'ho kwelis er wech kentan,
Ma e'halonik 'dride lirzin,
En ti ma mamm 'oan breman.

5

Ia! zantout 'ris e oan er ger,
En ti 'zavas ma zado
Da vamm Doue, d'ho mamm dener,
En eur lee'h sioul ha distro.

6

Eno e plije d'he pedi,
Eno, 'plije d'ar Werc'hez
Digemer mad kement hini
'Lake fe n'he madelez.

7

Neuze ma e'halon 'oa dinam,
Allas, aboé, o Mari!
E m'eus glazet kalon ma mamm,
Kalon ma mamm, hoc'h hini!

8

Mez pa ve klanv fall he bugel
Ar vamm outan 'neus true;
Ha kaër 'ma klask ouzoc'h montpell,
Mamm, ho kalon am e'heuille.

9

Ma m'eus troët keign d'ar pec'het,
Mar gon ho pugel arre,
C'houi 'oar, Gwerc'hez, piou 'n'eus roët
Zikour ha nerz d'am ine.

10

Nag a dud 'veld'hon 'p'eus gwelet,
Eus a dost, lies a bel,
A gorf, a galon gouliet,
Eas ho treid, en ho chapel.

11

Ha 'n'eus hini, o mamm dener,
Na n'eus ho pedet gant fe,
Na distroje skanvoc'h d'ar ger,
Wel a gorf, wel a ine.

12

Kant vloaz 'zo breman pe dremen,
Tud fal a zerras ho ti,
Da Bontreo gasas ho skeuden
Ha re ar zent all ganthi.

13

'Vel 'n'eun ti pa sko ar maro,
Dre oll oa kanv ha glac'har,
Ar gri forz a zavas er vro,
Ha spouronus ar gonnar.

14

« Demp oll, ia demp tud a galon
« Da gerc'het d'ar Feunteunio
« Hon Gwerc'hez, zant Blais, zant Anton.
« Zant Eler ha zant Kado.

15

Mont a reont bian ha braz;
'Neur ganan d'er ger teuent,
E n'eur ganan 'warlerc'h ar groaz,
Gauthe ho gwerc'héz, ho zent.

16

Ha pa deus gwelet ho mamm vad,
Er ger arre, en Klérin,
An daélo 'deu n'ho daoulagad,
Hag e koueont d'an daoulin.

17

Hag Itron-Varia-Glerin,
Anaoudek 'wit hon-zud koz,
A dol 'warne eur zel lirzin
Hag a ro dê he bennoz.

18

Nag a vurzud aboe 'd'eus gret,
'Wit diskouë he madelez;
Nag a dud a zo bet pareet
Gant dour feunteun ar Werc'hez.

19

'Vel thi, an Otro zant Kado
'Wella an dud gouliet;
Zant Anton, zant Eler a ro
Ho bennoz 'war al loened.

20

Zant Blaiz zo goude ar Werc'hez
Ar Zant brudet, er vro man
Rak gwellad ra eus en arwez
Nep c'houll skwazel digant-han.

21

An neb a bleg dindan ar bec'h
Pa bedo ar verzerien,
'N'eus bet 'veltan trubuilh ha nec'h
A gavo nerz d'hen dougen.

22

Miret en kreiz tud zant Kleve,
Gwerc'hez fe grenv ho zado
Gret ma vont dae'h gwir vugale
'N'eur gerzet 'war ho roujo.

23

Ma chomo fur hon iaouankiz
Ar vamm 'vo stad 'n 'he c'halon;
Ma teui iac'h d'ar ger 'war ho giz
'Re 'zo pell 'war ar mor don.

24

Keit a redo goad em c'halon.
Keit a c'hallin n'em stlejan,
Me deui aman de ho pardon,
Zeder, d'am mamm da ganan!

25

Pa n'hallin ken dont d'ho pedi
Gant ar c'hlenved diskaret
C'houi 'deui da welet d'e di
Ar paour kez 'n'eus ho karet.

26

Ia, c'houi 'chomo 'tal ma gwele,
Neuze gwerc'hez 'vin dinéc'h;
Ma mamm 'vo eno, ma ine
Gant joa 'nijo n'he divrec'h.

J. THOZ,

Person Lanhuon.

NIHIL OBSTAT.

Brioci, die 19a Aprilis 1913.

J.-B. CARLUER,

Can. tit. cens.

IMPRIMATUR.

Brioci, die 19a Aprilis 1913,

Y.-M. LE PENNEC,

Vic. gen.

Editions d'Arvor, Guingamp